

TASMANTOÙ GAMBETTA

Un testeni fromus zo bet distaget er sadorn all, en Arc'hantred-ar-Genkiz (nepell diouzh Gwitreg), en penn-pellañ ar vro war-du ar reter, ha se gant Riwanon Kervella. Bet eo bet mouezh he zad-iou-kozh bet en glec'h meur a viz e kamp heugus Conlie, Kerfank. Kement-se a oa er gouañv 1870-1871. Re vrudet eo istor Conlie evit bezañ adkontet amañ. Nann, re vrudet. War-bouez un munud bennaket marteze ?

Ar Badinguet en devoa divizet kas e armeoù da lammat war ar Brusianed. Hag an didrec'h, hag ar Brusianed o kemer beli. Ha sede Badinguet aet war goll ha mont etre krabanoù erered ar reter...

Ha deuet ar Gambetta da sevel an trede Republik a-raok na vije puraet ar marchosi... Ret e oa sevel armeoù gant ar pezh a oa, emezañ, kement ha talañ ouzh ar Brusianed daonet-se.

Arme Breizh a oa unan anezhe, savet gant tud deuet diwar o c'hoant dezhe pe gant tud rediet da vont ! Helebini etre an daou rummad, hag un hevelep tonkad trist ha heugus.

Met, ma Doue, penaos e c'haller sevel un arme, ha n'eo ket war Menez-Bre, hep reiñ pe fornis armoù, gwiskamant, to ha boued d'he soudarded ?

Trsit an Corbière a skrive en e Vugulgan Conlie (1870) :

Piv en devoa hon savet er miz du – Kala-Gouañv –
Ha ni parket evel chatal,
Evit lezel er fank, er miz duañ – Keverdu –
Hon c'hrec'hin deñved hag hon c'hroc'henn-ni ?

Piv en devoa hon laosket eno : faezh, hep spi,
Hep tamm goell a c'hoanag !
Oc'h en em sellet, evel pa glaskfemp ar Frañs...
Komik, doanius da welet !

Ya, chatal eo ar ger. Ar ger anavezet mat gant ar Gambetta a nac'has e savfe ar Vretoned a chatal da dud. Chatal kuzhet dindan ur gwiskad a dispri, a fae. Tud diempenn, gant ur prezeg heñvel ouzh trouzioù loened gouez, mat da chaseal. Moarvat eo se en deus talvezet da reiñ e anv da n'on ket pet ru pe blasenn en Breizh. Ya, badeziñ ! Ha koulskoude o dije bet c'hoant an istud-se kemer o fenn-bazh ha skeiñ didruez war e vadeziant. Met « vae victis », ha respont ebet all.

Gambetta a oa bet ur seurt keginer araokour, memes tra. Lakaet kig ar Vretoned en glec'h meur a viz en Kerfank. Peadra da distuzañ an douar :

Kerzh, te pa n'out ket bet peurlonket, â foz Conlie !
Eus hon gwad yaouank ha paouraet,
En ur welet da ed druz oc'h addiwan, ankouaat a reer
Hon eskern brein o simudiñ.

Hon c'hig peg ouzh pilhoù hon flotantennoù
- Teil berniet o-unan...
- Na debrit ket eus ar bara-se, mammoù ha merc'hed !
Druilh ar marv zo en ed.

Pebezh rekipe keginañ ! Ha ne diougan ket un rekipe ken heugus all ? Kig drailhet, gwad kaouledet... daou rummad all goude, e foziou all...

Gwir e oa bet skol Gambetta hag e santier o stummañ mat spered ar skolidi yaouank da soñjal ha da vezañ prest evit ar brezel-se... Gwir ne oa bet morse kement a gezeg labour anvet Alzas pe Loren er menajoù eus Kerne da Dreger, eus Leon da Wened... Dalc'homp soñj...

Herve Bihan

« Manuel Tieg eo ma anv, ganet on e 1843 e Langoad, ur barrouz a vro Dreger etre Lannuon ha Landreger.

N'on ket dimezet ha 27 vloaz e on pa'm eus kemeret an tren e Gwengamp e dibenn miz Here 1870. Me zo unan eus ar re zo bet savet gant Arme Breizh, bet lakaet war-sav evit difenn Breizh a-enep ar Brusianed hag evit bezañ prest da bourveziñ Pariz eus tu ar c'hornôg pa vefe ezhomm.

Evel ma c'hamaladed all em eus gouezet e oa bet savet Arme Breizh ha klevet pe lennet : *Bez ho po ar pezh a rank pep soudard kaout : fuzuilhoù a denn primm, kanolioù a gas pell, mindrailherezioù eus ar re vodernañ.*

Unan on neuze eus an 2 000 den o tont eus Aodoù-an-Hanternoz ha kaset en tu all da harzoù Breizh da Gonlie e-kichen ar Mañs. Eno zo bet roet deomp lien ha pikedoù evit sevel teltennoù, bizhier ha botelloù plouz. Fuzuilh ebet nag evit pleustriñ nag evit en em gannañ.

Fall eo an amzer en diskaramzer-se. Ar glav n'en deus ket paouezet da gouezhañ adalek miz Du betek hanter miz Kerzu. An armoù prometet ne deuont ket, nebeutoc'h-nebeutañ a voued zo. Hir e kavan an amzer, ar yenijenn a dag hag ar c'hleñvedoù en em led er c'hamp. Klask a reomp goudor, en aner. Anat e teu da vezañ ne raio Gambetta, ministr an diabarzh, netra evit soudarded arme Breizh renet gant ar jeneral a Geratri.

Setu ur pennad brav n'eus ket ken a blouz fresk na sec'h, an dour a ruilh e pep lec'h. Renket em eus mont er-maez eus an deltenn. Sur-mat on bet unan eus ar re strollet ha stardet an eil ouzh egile o krial : « d'ar gêr, d'ar gêr » ha na dalveze ket « d'ar brezel » evel ma komprenne reoù zo na oant ket brezhonegerien.

Met Gambetta, ne fell ket dezhañ, evit priz ebet, lezel ar soudarded da guitaat ar c'hamp, ha chom a ran amañ, hep netra d'ober, me hag a zo ken kustum da labourioù kalet an ti-feurm, ne ran nemet gortoz, gortoz, gortoz... Mailh zo e pep lec'h, darn eus ar soudarded a varv kaset gant an dour beuz pe lonket ha sac'het er fank. Ya, e Kerfank on o vevañ, bac'het. Mervel a reer n'eo ket hepken gant ar riv met ivez gant ar pleurezi, ar vrec'h, ar red-korf hag all.

Ha goude ar glav, setu ar skorn hag an erc'h, n'em em gannañ ket a-enep an enebour met a-enep ar yenijenn, ar gwrez o tiskenn a-wechoù betek 15° dindan zero.

Ha setu mizioù kentañ ar bloaz 1871, kemeret em eus penn an hent etrezek Roazhon gant ma c'henvroad ar Bever, bep a benn-bazh ganimp ha distroet on d'ar gêr, da Langoad, war droad. N'em eus lezet skrid ebet war ma lerc'h met miret ma fenn-bazh ma buhez pad. »

Manuel Tieg

Manuel Tieg zo dimezet e 1892, ugent vloaz goude vefe distroet eus Conlie. Tri bugel en deus bet, unan anezho oa ma mamm-gozh. Marvet eo Manuel Tieg e 1904 d'an oad a 61 bloaz, dres 120 vloaz zo er miz-mañ. E benn-bazh zo bet treuzkaset a rummad da rummad abaoe hag emañ bremañ ganin, me e verc'h-you-vihan.

Pa welan anv Gambetta roet d'ur straed pe d'ul lec'h all bennak e Breizh n'on ket hep soñjal n'eo ket reizh, lezet en deus a-ratozh, evit abegoù politikel, miliadoù a Vretoned da vervel ha da vreinañ e Conlie. Un torfed eo.

Dalc'homp soñj.

Riwanon Kervella

Levrlennadur

[Émile de Keratry] Armée de Bretagne, 1870-1871. Dépôts devant les commissions d'enquête de l'Assemblée nationale, avec carte à l'appui. Rapport de la commission d'enquête (1873) :

<https://gallica.bnf.fr/ark:/12148/bpt6k6373981b/fl.item>

Camille Le Mercier d'Erm, L'étrange aventure de l'Armée de Bretagne, Presses Universitaires de Bretagne, Saint-Brieuc, 1970 [embannadur kentañ en 1935]

Ana Sohier & Michel Sohier, Tu seras soldat – l'enfant et la guerre à l'école primaire 1871-1918, Musée rural de l'éducation dans les Côtes-d'Armor, 2008.

Tristan Corbière, Les amours jaunes, Glady frères, Paris, 1873 [diwar-benn Pastorale de Conlie (1870) : https://www.persee.fr/doc/abpo_0003-391x_1970_num_77_2_2545] [an tammoù zo eus ar Bugulgan zo bet troet ganin, HB]

Pladenn Glenmor o kanañ barzhonegoù Corbière, Bugulgan Conlie (La Pastorale de Conlie) en o mesk :



Breizhad yaouank gant e benn-bazh